

## da feiz hon tadou koz

*Diskan :*

Da feiz hon tadou koz, ni pôtrez Breiz-Izel,  
Ni 'zalc'ho mat ato;  
'Vit feiz hon tadou koz hag en-dro d'he baniel,  
Ni holl en em stardo.  
Feiz karet hon tadou, morse ni n'ho nac'ho,  
Kentoc'h ni a varvo ! (3 gw.)

Keit ha ma lugerno, e bolz uhel an neñvou,  
Ar stered hag al loar gant an heol benniget,  
Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hemennou  
Hag a vevo dalc'hmat 'vel gwir gatoliked.

Keit ha ma vezo mor da luskellat Breiz-Izel,  
Da floura he aochou, da bokat d'he reier,  
Kristenien e chomimp, en despet d'an holl vrezel  
A ray d'eomp an dud fall, marc'hadourien geier.

Ni 'zo Bretoned yac'h, dispont e-giz hon Tadou;  
Birvi a ra ennomp kalon ar gwir zoudard.  
Eur Breizad hag a dro da-heul ar fals-kredennou  
N'eo ket eur gwir Vreizad, n'eo nemet eun trubard !

## kantik ar baradoz

Jezuz pegen bras 've  
Plijadur an ene,  
Pa vez e gras Doue  
Hag en e garante.

Berr 'kavan an amzer  
Hag ar poaniou dister,  
O soñjal deiz ha noz  
E gloar ar baradoz.

Pa zell an neñvo(u).  
Etrezek va gwir vro.  
Nijal di a garfen  
Evel eur goulmig wenn.

Pa vo pred ar maro,  
Neuze me 'gimiado  
Diouz ar c'hig añkenius.  
Enebour da Jezuz.

Gortoz a ra gant joa  
An termen diweza :  
Mall am eus da welet  
Jezuz, va gwir bried.

En holl boaniou kalet  
A gorf hag a spered,  
Me 'zoñjo deiz ha noz  
E gloar ar Baradoz.

## adoromp holl

Adoromp holl, e Sakramant an Aoter,  
Doue kuzet, Jezuz, hor Mestr, hor Zalver,  
Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,  
Gant karantez a d'an meulit-heñ deiz ha noz.

Gwir Vab Doue, en em c'hraet den d'hor prena,  
En osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga;  
Plijet ganeoc'h skuilha, eus ho tron an aoter,  
Warnomp daoulinet amañ ho pennoz, va Zalver.

Enor ha gloar ha karantez da Zoue :  
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive;  
Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien  
Aketus d'e veuli hirio ha da viken.

## patronez dous ar folgoad

*Diskan :*

Patronez dous ar Folgoad  
Hor Mamm hag hon Itron,  
An dour en hon daoulagad,  
Ni ho ped a galon :  
Harpit an Iliz santel,  
Avel diroll a ra...  
Tenn hag hir eo ar brezel !  
Ar peoc'h, o Maria !

Eus an Arvor, ar gourre,  
Ni 'deu d'ho saludi;  
Holl ez omp ho pugale,  
Holl ho karomp, Mari.  
Tud ar gourre, Arvoriz,  
Diredet omp hirio  
Da bedi 'vit an Iliz,  
Da bedi 'vit hor bro.

Gwechall er vro-man 'veve  
Eur paour berr a-spered :  
Salaun ar Foll ne ouie  
Netra koulz lavaret.

Daou c'her « Ave Maria »  
Setu e holl bedenn;  
N'ehane ket d'o c'hana  
Diwar skourr e wezenn

Pell amzer, kan a zavas  
A-us d'ar wezenn deo :  
Eun deiz ar vouez a davas,  
Salaun ne oa mui beo :  
E ene gant an Elez  
'Oa aet d'ho lez, Itron,  
Da gana ho madelez  
Bepred e-tal ho tron.

Ma klevit mat hor pedenn,  
Mirit na d'aimp da goll,  
Ma c'hellimp kana laouen  
Evel Salaun ar Foll :  
« O Mari ! O Maria ! »  
C'houi vezo hon Itron;  
Betek an eur diweza,  
Renit en hor c'halon.

